

AR BARIZIANEZ

WAR DON : *Ar Pilhaouer.*

En hon Bro Breiz eman ar c'his
 Gant eur rumm merc'hed yaouank
 Da vonet hirie da Bariz,
 Da glask madou, bue frank ;
 C'hoant o deus da vezan matez
 Dindan an holl er c'herio.

DISKAN

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
 A ra mez da dud he Bro !*

Gonid bara en Breiz-Izel
 Ar plac'h yaouank na c'houll ken ;
 En he fenn a zo deut avel :
 — « Tro, emei, d'ar skubelen ! » —
 Setu hi o tec'hel hep mez
 Pell diouz he zud en daëro...

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
 A ra mez da dud he Bro.*

Ma c'houllfe an dud diganti
Pelec'h ec'h a ken diskwiz,
Hi a larfe, hep he fedi :
— « Me ac'h a da Ba-a-riz ! » —
Ha neuze d'ar c'henaouegez
Pep den, dre fent, a laro :

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

Pa vo pellaet diouz he Breiz
Hag en Pariz dizanve,
Al labouriou kaled, direiz,
Eviti a vo mad tre ;
Evel eul loen 'hed he devez,
Hep paouez hi a boanio . . .

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

Koll a rey ebarz ar gêr vrás
He zammig nerz, he yec'hed,
Ha pez eo ar gwasan, siouaz !
He furnez ha he gened ;
Ne viro eus ar Vretonez
Netra nemet an hano !

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

Ma tigoue d'ezi dont en-dro,
Goude vo bet en Pariz,
Neuze e vo eur plac'h faro,
Eun dimezel eus ar c'hiz ;

Gwisket 'vo 'vel eur rouanez,
'Vo ken anveet 'n he bro !

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

War he fenn, evel eur sparfel,
'Vo gwintet eun tok re vrás,
Ma laro outan an avel :
— « Heman zo prest da vont c'hoaz ! .. » —
Leun 'vo ar plac'h a lorc'h, a c'houez
Eus lein he fenn d'e boto !

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

Dilezet 'vo ar brezoneg,
Ankouaet e vo ganti ;
Distaga a rey en gallek :
— « Oh ! lè, lè, j'viens d' Péris ! » —
Eur vez 'vo gwelet ar plac'h kez,
Gand he stumm hag hec'h ardo...

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

Da bep tra ebarz Breiz-Izel
Hi a gavo e dam zi,
N'he devo ouz bro he c'havel
Nemet droug ha kasoni ;
Er gér hi a vezò diez,
Red vo d'ai mont c'hoaz en-dro !

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

Ar plac'h nan eo ken Bretonez,
Rag he bro he deus nac'het,
Bezan eo eur **Barizianez !!**
Ha piou an ije sonjet ?...
— Youc'homp holl eta en eur vouez
Warni a-bouez hon feno :

*Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !*

AR YEODET.

